

un miracle à Trézien ?

Les témoignages de miracles réalisés par Notre Dame de Trézien sont rares. Pour être franc, personne dans la région ne se souvient avoir connu un quelconque miraculé. Il faut remonter dans les archives pour en trouver témoignage. Le texte qui suit relate l'aventure survenue à Christophe Quellec en 1873. Il est extrait de **Miz Mari Eskobti Kemper ha Leon**, Brest, 1909, par Prigent J.L. Il est rédigé en breton et est précédé d'une petite présentation du culte de Notre Dame de Bon Secours, plus connue localement sous le nom de Notre Dame de Trézien.



Seitekved Devez

Introun Varia Trezien
(*Plouarzel*)

Seiz pe eiz kant vloaz a zo, e voue savet e parrez Plouarzel, eul leo benag dez ar bourg, eur chapel en honor d'ar Verc'hez : hervez lod en unnekved kantved, hervez lod all en trizekved. Ar chapel-ze, goestlet da Introun Varia Vir Zikour, a zo anavezetoc'h dindan an hano " Introun Varia Trezien". Endro d'ezi e z'euz kalz eienennou ; douetuz braz eo bet galvet Trezien, abalamour m'edo e treo an eien : marteze goulskoude eo bet roet an hano-ze d'ezi, abalamour en he c'hichen e z euz tevennou treaz.

Gant piou ha perak eo bet savet ar chapel-ze ? Ar skridou koz a zo bet kollet pe zevet : setu perak ne c'heller goaranti netra.

An taolennou, ar skridou, eme an Ao. de Kerdanet, ar branellou, ar bisier, al listri stag ouz ar mogeriou, a ziskouez eo bet Introun Varia Trezien mad evit he bugale.

Var eun daolen e veler eul lest e kreiz eur barr-amzer spountuz : goloet eo gant ar mor : en oabl, ar Verc'hez gant ar mabig Jezuz etre he divreac'h ; e traon an daolen e lenner : " 23 a viz kerzu 1789 : Youen Trebaol, kabiten ; an aotrou markiz de l'Aigle deuz Landerne, da Introun Varia Trezien. "

Var eun daolen all, e veler eul lestr oc'h enebi ouz ar mor kounnaret : riskl braz a zo evitan : en oabl ar Verc'hez gant ar mabig Jezuz var he barlen : er c'horn diou, e lenner : " Veu great da Introun Varia Trezien gant Tanguy Le Drasd hag e vartoloded, 29 a viz gouere 1763."

Er bloaz 1875, ar chapel genta a ioa c'hoaz en he za : fall oa deuet da veza goulskoude. Kristenien Plouarzel ha divar dro a zonjaz n'oa mui deread avoalc'h : setu perak e c'houlennont ma vije pilet ha great eun all kalz kaeroc'h.

D'ar 25 a viz meurzh 1876, an Ao. Gall, persoun Lokournan a vennige ar mean kenta ha d'an 10 a viz mae 1877, ar chapel a ioa peurc'hreat hag an Ao. Nouvel, eskob Kemper ha Leon a deu d'he benniga.

Introun Varia Trezien a zo bet hag a gendalc'h da veza meurbed madelezuz e kenver an dud a bed anezi gant fizianz.

Er bloaz 1868, eme Gristof Quellec, edon o choum e Leur-Vraz, keriaden deuz parrez Konk (Leon). D'an daou a viz c'houevrer, daoust d'ar boan em boa e va divesker abaoe 6 miz, e c'houlenniz mont d'an oferen : beac'h em boue o tizrei d'ar gear. Divar nneuze va foan a deuaz da veza krisoc'h-krisa ha dizale ne c'helliz mui ober kammed ebed. Ar medisin a voue galvet hag an Ao. Macé a lavaraz oa red d'in bale. Siouaz ! n'em boa nerzik ebed em divesker. Al louzou ne reant vad ebed d'in ha ne rean nemed falaat ha semplaat. Epad 18 miz, ne zrebiz nemed tri vi bemdez. Nec'het, va zud a gasaz ac'hanon da Lanniliz. An Ao. Morvan ne c'hellaz miret d'o skandalat abalamour m'o doa kredet, er stad m'edon, va lakaat da ober eur veach ken hirr. Mont a riz teir gueach d'e velet : an dro ziveza, pa glevaa gant va zud e felle ato d'an Ao. Macé ober d'in bale, e lavaraz : " Kentoc'h e lakeoc'h ar vaz a zo en ho tourn da vale. "

Va c'herent a velaz neuze n'oa nemed Doue goest d'am farea hag a lakeaz o oll fizianz er Verc'hez. Beteg diou veach, astennet var eur c'holc'hed, rag ato e ranken choum gourvezet, e z'iz da bardouna da Drezien : ar Verc'hez a reaz skouarn vouzar. E miz meurzh 1873, e vouen kaset da japel Lokrist evit ober va fask. Goude beza kommunit, eun dra benag a lavare d'in prometti mont eun drede gueach da Drezien hag e vijen pareet. Tri devez goudeze, a lavariz an dra(ze d'am zud. " Eun dra benag ive, eme va mam, a lavar d'in e vezi pareet ma tistroez da velet Introun Varia Trezien. " D'an 28 a viz mae, edon er chapel benniget. Goude an oferen lavaret dirazon, e pediz va zad d'am c'has beteg ar gloued pe ar balustrou. Choum a c'helliz var va daoulin : ober a riz neuze eur beden galounek d'ar Verc'hez hag en eun taol e santiz ar vuez o redet dre va izili : pare oan. Digouezet er gear, va breur bihan, ouz va guelet o vale, ne c'hellaz ket va anaout : n'en doa guelet ac'hanon nemed gourvezet. An devez varlerc'h, va c'hofesour, an Ao. Brignou, a deue beteg va zi : gant an oll e lavaraz e doa great ar Verc'herd eur burzud em c'henver. Divar neuze e kendalc'hiz da vellaat hag e c'helliz, heb en em skuiza, mont d'ar skol da Gonk, a zo tri c'hart leo deuz al Leur-Vraz. Neubeud goude e teuen da veza goveller, va nerz a greske bemdez (1).

(1) Kristof Quellec en deuz skrivet e-unan an dra-ze d'an Ao. Brignou.



Statuette de Notre Dame, à la fontaine de Trézien.